

DEZRVELLOÙ AN DUD KENFINET

RÉCITS DE CONFINÉS

- Gallout a rit mont e-barzh, emezi.
- Gallout a rit mont e-barzh, emezi da fulenn ar pevare estaj.
Ne lavar nemet se. Bemdez. Da vintin, deus noz. Da paotr al lizhiri, d'ar vaouez a neta an diri. D'an dud o chom amañ ha d'o mignoned. Hirvoudus e rank bezhañ. Hirvoudus eo evidomp, d'an nebeutañ : n'eus ket ezhomm deus ar vouezh-mañ.
- Gallout a rit mont e-barzh.
Met bremañ eo kazi mut. Aet eo kuit fulenn ar pevare estaj hag ar studierien all o chom ganti.
Tad-kozh an eil estaj ne z'a ket er maez ken. Koñfinet omp ha ne gomz ket alies plac'h an interfon.
- Gallout a rit mont e-barzh.
Ya, mersi deoc'h, plac'h an interfon. Ma c'hellan mont e-barzh e sinifi on aet er maez. Hag hiziv n'eo ket nebeut a dra !

Maiwenn